

Ma c'henvroiz ker,

Gwelet a ran, gant kalz a geun, penoz na garet ken, nag hon Bro, nag hon iez koz. Petra 'zo kiriek ? Ze a deu, m'oar vad, deuz an dispriz, ar fae a ve groet er skolio war ar brezonek. Na ve ken disket d'ar vugale, na lenn, na skrivan brezonek, ha koulsgoude, n'en neuz ket eur iez kosoc'h 'vit-han. Dale'het mad d'ehan, rak pa vo ankoæt, evit diski

gallek fall, na vo ken a Vreiz-Izel, hag hon zenzorio all, ar fe, al lealded a ielo ive digan-imp.

Evit ober d'ac'h karet iez hon zado, ec'h an da laret d'ac'h, gwellan ma c'hallin, eur marvaill c'hoarveet da goulz ma oa zent Breiz-Izeliz. Mar peuz eur plac'h bihan pe eur potr bihan er skol, laret d'he lenn ar gontadenn-

man, krenv, en korn an tan, en eur domman, ha, pa na c'houveo ket leun mad eur gir ben-nak, c'houi a laro d'ehan. Er giz-ze e tisko er ger ar pez a dlefe bean disket d'ehan er skol. Ha groet hevelep tra 'vit Buez ar Zent, ar C'hatekiz, Buez Zant Ervoan, hag ann Aviel, hag ar levrio mad-all skrivet en Brezonek.

BOTOIGO AR WERC'HEZ

Bean 'zo, en-tu-bennag, en Breiz-Izel, war lez eur c'hoat braz, eur chapelik koz, zavet en enor d'an Itron Varia. Ann doen goz mein-glaz, hag ar mogeriou hanter-vreuzet, a zo paket gand an illeo, a ra d'he 'vel eur vantel glaz ha dantelezet. Dister eo ar chapel, daou brenestr, a zo beget ar pennar krouec'h anhe evel eun u iar, a sklerijenn anehi, ha dindan eun tourig bek-moan, elec'h ma zo ar c'hloc'h bian en pign, e tigor an or vraz koat derw, kizellet ha dantelezet, mez hanter-vrein. Ar c'hloc'hik 'neuz eur voez moan ha skeltr a zav 'vel kan an envnig a-uz d'ar c'hoat, hag a ve klevet a-bell.

N'eo ket gwall gaer ar paour keaz chapel, n'euz mann en-hi brao da welet... mann nemed ar Werc'hez, eur Werc'hez koz, ha koant bepred. Piou an neuz groet anehi ken koant, ken brao ? Enn den n'oufeer doare d'ehan, ha na neuz ket skrivet he hano war ar jijen ; eun den dornet mad koulsgoude, hag eur c'hristen evel m'eo gleet. Diouz gwelet anehi, pa sko war-n-hi eur bann heol, dre ar prenest, ha pa hij war-n-hi skeud an deliou-illeo, e lavarje eun den ec'h eo hec ar Werc'hez, gant

kel tomm, ha da zigaz d'he da zibri. Ha me, piou eta en deuz koun diouz-in ? »

Koulsgoude, bean e vije evuruz awecho, pa c'halle monet d'ar chapel. Eno en nevoa kavet eur Vamm ! Ar Werc'hez trugarezuz, a zeblante d'ehan e selle d'he gad, enn eur c'hoarzin djouthan, ken zeder ! hag aliez e teue eno da ouelan ouz treid he Vamm deuz ann Env.

Kreski a re 'ta, en despet d'ann toliou, ha d'ar iuniou, karet gant ar Werc'hez koant da behini gand fianz e bre he holl drubuillou. Erru oa en oad d'ober he Bask kentan ; ha daoust da Will, ar hotoer da vezan drouk, n'helle ket hen harz da vonet d'ar c'hatekizou. Eno, Herve a oa ken fur, ken aketuz da ziski, ken ma oa wet evit skouer d'ar re-all gant an aotrou Person, Pa dosteaz miz mae, miz ar bleuniou, miz ar neziou, miz ar Paskou kentan, ar Person a lavaraz d'ar vugale e vije mad d'he rei eur prof bennag d'an Itron Varia, de ho Fask. An daelou en he zaoulagad, Herve, stonet ouz treid he Vamm, a lavaraz d'ehi : « Ha me, paour keaz, petra a roin-me dac'h ? Alaz ! Mammik ker, na meuz mann,

gant ma mam. » Neuze, mab ar Markiz, Raoul Kerbruk, a digoraz eur c'hef bihan, hag a diskouez d'ar vugale zouezet, eur gurunen aour, perlezet, a lugerne war eur fonz voulouz glaz. Herve, glac'haret ha mezek, a blegaz he benn, daelou enn he zaoulagad. Deuet e oa he joa gant goaperez ar vugale-ze, kri a galon ; n'en devoa ken c'hoant ebet, nemed da vruzuni dindan he dreid ar botoigou en nevoa kleuzet ha brodet gant kement a garante. Mez ar Person a dosteaz, hag a frealzaz he galon baour 'n eur laret : « Ar Werc'hez a zello muioc'h d'ar c'halonou 'vid d'ar prof e vo groet d'ehi. Deut, bugale, d'ar brosizion evid kas ho prof d'an Itron Varia. » Monet a rejont' ta, laouen, en eur ganan kantikou. Goude ar gousperou, — laret « war ton ar c'hrampoez gwiniz » gallet a red em c'hredi ! — peb hini a dosteaz, da rei d'ar Werc'hez he prof. Ar markiz bihan, Raoul, da gentan, gant lorc'n, a bignaz war eur skeul vihan, da lakaat war benn ar Werc'hez he gurunen steredennet. Ar re-all a zeuaz ive, ann oil goude egile, ha Herve an diwean, deur en he zaoulagad glaz e zello

eun den dornet m'eo gleet. Diouz gwelet anehi, pa sko war-n-hi eur bann heol, dre ar prenest, ha pa hij war-n-hi skeud an deliou-illeo, e lavarje eun den ec'h eo beo ar Werc'hez, gant hi bleo melen-aour, hi diou-jod ru, hi genô hanter-digor o vous'hoarzin ken douz, hag hi daoulagad glaz-glizen o zellet gand madelez ouz ar re a ia da bidi anehi. War he zal gwenn 'vel ar flourdelizen, a zo eur gurunen steredennek, eur wel gwen-kan a guz hi bleo hirr, hag eur zae wenn, gand rozennou aour, a wisk anehi, hag a zo dalc'het gant eur c'houriz glaz 'vel bolz ann env. Hi daouarn gwenn 'nem stard war hi mabik Jezuz, a zo he zivrec'h en dro da c'houg hi Vamm, hag he benn melen war hi skoa.

Enn treid ann Itron Varia, o tra burzuduz ! en 'hi zreid a zo eur botou, ia ! eur botou koat, bihan ha koant, 'vel hi zreidigou gwen, botou koat melen, liou kistin, kizellet evel koat dantelezed. Botou koat ? d'eur Werc'hez ? biskoaz kement-all na peuz klevet, me gred ? Ac'hanta, chilaouet, ha me a ia da laret d'ac'h pebez burzud a c'hoarveaz diwar benn ar botoigo-ze.

'Barz ar c'hoat-ze, en kichen ar chapel, a oa bet kat, bean 'zo breman pemp kant vla, en amzer brezel braz Breiz-Izel, eur c'hrouadur kaji-noaz, a ouele hag a hirvoude, kollet gant-han he vamm. Ar botoer koat, a gavaz anehan, barz an touffle, hen dastumaz hag hen douguz d'he lojennik, e-kreiz ar c'hoat. Med n'eo ket dre drez hen-miraz, rak ar botoer-man, Gwill he hano, a zonzaz penaoz e kavje tad ar bugel, hag en nije digant-han eur gaer a aluzen dre drugare.

N'hallaz ket kaout doare 'bed deuz tud ar bugelik, ha bep ma kreske he-man en oad, e rustae diouthan. Herve — ann hano-ze a oa roet d'ar bugel — a oa 'ta zavet evel eur paour kez emzivad, aliesoc'h en nije skouarniadou 'vit na nije bara.

Biskoaz na c'hoarze ar bugel paour. Chom a re awecho 'barz ar c'hoat gwell-bell da chilaou kana ann evnedigou koant ha skanv, ha neuze e sonje enn he-man. « Al lapouzed tener ho deuz eun nezik klouar, eme-han, hag eur vamm vad da c'holo anhe gant hic'h as-

de ho Fask. An dañlou en he zaoulagad. Herve, stouet ouz treid he Vamm, a lavaraz d'ehi : « Ha me, paour keaz, betra a roin-me dac'h ? Alaz ! Mammik ker, na meuz mann, rak ma c'halon a zo dac'h a bell zo ! » Ann heol, o paran war dreid noaz ar Werc'hez, a zigazaz d'ehan eur zonz brao ! Monet a reaz d'ar ger, ha, gant eur gountel lemm hag eun tamm koat fao, en em lakeaz, en kuz, da labourat gant pred. Ar c'hoat a gemeraz tamm ha tamm, stumm diou votezik skanv ha koant ; neuze ho brodaz, ho zoullaz, gant bek he gountell, hag a reaz war ho chouko evel deliou ha boke-dou meurbet fin ! Goude-ze e vogedaz anhe, ken e oant alaouret, melennet ; ha koant e oant vel diou vagik, gant ho bek moan ha tronset war grec'h, hag eur rozennik er c'hreiz. Laret a vije eur boket bleun ha deliou koat. Luc'han a rent zoken 'vel kistin darou.

Chetu arru de kaer Pask ar Vugale. Herve an nevoa bet digant Itron ar c'hastel, eur gwis-kamant nevez, giz ann amzer-ze : brago berr ha porpant glaz-mor. He vleio hirr, melen ha flour, frizet 'vel glan an oan bihan, a gouee war he ziouskoa, 'n eur lugerni d'an heol, dindan he dog ledan, hag he zaoulagad a steredenne gant laouenidigez he galon.

Dindan he vrec'h, e oa ganthan, paket 'n eur lien gwenn, ann diou votez dantelezet. Da betra laret d'ac'h he evuruzted pa zeuaz enn he galon glan ar Mabik Jezuz, he Vreur ken karet ? C'houi hen goar, an deiz-ze eo ar c'haeran deuz ar vuez, ha Herve n'en nevoa bet evuruzted 'bed c'hoaz...

Goude ann oferenn, ec'h eaz ar vugale, herve ar c'hustum, da leina d'ar presbitor, ha goude ec'h ejont da c'hoari eur pennad e-barz ar prat braz. Neuze, peb hini a ziskoueez he brof. « Herve, eme ar re-all, diskoue ar pez a roi te d'ar Werc'hez ! » Herve a displegaz ar lien gwenn. A boan oa digoret ar paket, ma n'em lakeaz ar re-all da c'hoarzin a-bouez ho fenn, ha d'ober goab deuz ar paour keaz botoer bihan. « Botoigou koat ! d'ar Werc'hez ! he ! he ! red eo did bean loué ! Ha penaoz a lakei te anhe d'ehi ? — Zell, eme mab ar miliner, zell ar chaden aour a roin-me d'ar Werc'hez ! Ha me, eme eun all, me a roio d'ehi eur wel, lien fin ha flour, neet gant pred,

a bignaz war eur skeul vihan, dh lakaat war benn ar Werc'hez he gurunen steredennet. Ar re-all a zeuaz ive, ann eil goude egile, ha Herve an diwean, dour en he zaoulagad glaz a zelle piz ouz ar Werc'hez. « O Mammik ! emean, na ret ket fae diouz ma labour, gant-han ec'h adroan d'ac'h ma c'halon. » Koulskoude, pa oa 'arru tost, e chommaz abov, mez ar Werc'hez a c'hoarze ken tener, ken ma tost-teaz krenn. O ma zud vad ! pebez burzud a oa gwelet neuze !...

Ar Werc'hez koat a zavas, ann eil goude egile, he daou droad gwenn, ha Herve a c'hallaz, 'neur grenan, gwiskan enhe ar botou dantelezet !... Ha neuze ar Werc'hez a astennaz he brech, 'neur blegan he fenn kurunet da gad an emzivad disprizet, hag a lakeaz he dorn binniget war he benn, hag eur pok karantezaz war he dal gwen ha glan !...

Ar bugel paour, dindan ann douzder deuz ar pok dudiuz-ze, beuet he galon a levenez, a gollaz anoudegez, ha douzik a ruzaz hag a goueez war ann douar. — Ann aotrou person, souezet braz ha spontet, hen adzavaz : ann daoulagad glaz a voa digor ha leuna evuruzted, ar geno ru a vouz'hoarze c'hoaz, mez ar galon, re vihan 'vit kement a levenez, a oa paouezet da skei ; zeblantout a re bean maro. Na oa ket, koulskoude, na oa ket maro dre laouenidigez. Eur pennad goude, Herve, stouet d'ann daoulin dirak he Vamm, a re d'ehi gwestl deuz he vuez oll... Ar Werc'hez a oa adzaved 'vel diagent, eun hevelep c'hoarz douz war he geno koant, mez ar gurunen lugernuz war he fenn, ar wel war he bleo, ar chaden aour enn he c'herc'henn... hag ar botou dantelezed enn 'he zreid... Ha Herve ?... Herve na c'houllaz ket adkemer ar galon en nevoa roet d'he Vestrez, na biskoaz den ken na deuz poket d'ann tal-ze, a oa bet evel gwestlet gant geno glan ar Werc'hez... monet a reaz raktal d'eur manati, hag eno, e varvaz evel eur zant, goude eur vuez a beden hag a binijen... Graz a c'houlennan digant Doue, evidoc'h evel d'in ma-unan, c'houi pere a lenno ar burzud-man.

Evel-ze bezet groet.

HERMINIK.